

5711 10¹ Sou ar glao.

————— 1 —————

Nevez a zo divarben ar glao,
 Em boa lennet eun histor vras,
 Eun histor hag a raio vad
 D'an dud a glemm euz Doue ^{Salvad.}
 [dalc'h mad.

————— 2 —————

Eun deiz bennag eur marc'hadour,
 Eleiz gant han a bezion aour;
 Enem gavas eun tammik divezad
 Da zont d'ar gwear, euz ar marc'had.

————— 3 —————

Setu deuet eur barrad glao,
 Beza dindanna ne voa quet bras;
 Dillad ar paour hez marc'hadour
 Dizale a zo eat gleb dour.

————— 4 —————

Dre ma tigouez an amzer,
 Eo mad d'an den en diguemer;
 Nevez ar beachour er c'hwintol
 A eneb Doue a c'hwasmol.

5

Mea vijen bet Doue emezhan,
 Ne rafen rafen quet a c'hoar brema;
 Pec'hed eo bezas didruer
 Ouz an dud keiz a zo er mez.

6

E pad ma kendalc'h evelze,
 Da damall an dotrou Doue;
 En eur lavaret eo didruer
 E kichen eur c'hoat e tigouez.

7

E man o vont ebaz disourzi kaër,
 Da zilam ac'hano eul laër;
 Eul laër ganthan eur fusul garguet
 Hea prest da ober an torfed.

8

Da vel eo bizet dezhan an ten.
 Or marc'hadour a soubl e ben;
 Or paour keuz den a gav dezhan
 Ema siouz echu ganthan.

9

Ne ket, Doue en e vadelez,
 A asten dezhan he vuez;
 Er poultr zo glepjet un tamic
 Hag ar fusul ne lavai grik.

10

Er beachour er savete,
 Lavar d'ioñh tu bennoz Doue;
 Bennoz d'ar glao a zo kuzet
 Onez ar glao e voan lazet.

11

Anter noz vintin pa savaz,
 D'he rugale e lavaraz;
 Meulit Doue va rugale ger
 Dre moa bet deac'h fell an amzer.

12

Hag hon neuze hounta d'ezho;
 Oa bet kostic dezhan ar maro;
 Onez ar glao emezhan
 E haon d'ho tad vec'h bet brema.

13

Nag a dud siouaz a zo,
 Da vez an amzer divalo;
 Et vez klevet oc'h enem glemm ouz Doue
 Na distiant eo an dud-ze.

14

Lezomp Doue da renn ar bed,
 Ervez he volontez bepred;
 Troag ni hor spered a zo qual ver
 Da zesti Dezhan e vicher.

15

Nouz forz pe seurt amzer a ve,
 Eur quir gristen a veull Doue;
 Dezhan hel lavar o va had
 Chui glasq bepred va brazo mad.

16

Dre ar see hor an doue-er,
 Du ienien an domder,
 Tra viot vo gant an oll bepred
 Meulet oc'h Hano benniget

M^{lle} Françoise Calvez, Leure, Bourg-Blanc.